

Bravik ec'h eo bale bale... war velo ! (II)



E Finland eo naturel mont war velo war an erc'h, d'ober prena-dennoù pe da vale.

Souezhus eo gwelet penaos emañ kont e broioù hanternoz Europa, pegement a veloioù a vez e kreiz ar c'hêrioù, ha dre-holl.

Pa'n em gaver e Kopenhagen, a-dal d'an ti-gar, an dra gentañ a weler eo ar bern beloioù (200, 300 mar-teze ?) renket mat war ar **riblenn-straed**. Hevelep tra etal digorioù ar metro, war al leurioù bras, e-kichen ar monumantoù...

Ha da c'houde, e vez gwelet leun a dud o vont hag o tont trankilik war o marc'h-houarn, mammoù war o c'harrigoù teir rod o pourmen o bugale vihan, darn kousket, hep aon.

Ya, aon ebet da gaout : hentoù zo bet savet evite partout, distag eus an hentoù evit an otoioù ha distag ivez eus ar riblennoù-straed evit an dud war droad. Int a dremen araok an otoioù er c'hroashentoù. Aezet eo dezhe ruilh war o marc'h-houarn : plaen eo kêr ha kement tra zo bet graet evite.

Muioc'h en hanternoz c'hoazh e ra an dud belo war an erc'h ken aezet ha tra e-pad ar goañv, a vez gwall hir dre eno. Ha ne gouezhont ket ! **Bandennoù-rod** graet diouzh se, ur boned war o fenn ha manegoù tomm en o daouarn : mat eo jeu ! Ha deomp dezhi war-lerc'h stlejell ha kirvi-erc'h an tad Nedeleg (hemañ zo o chom e Rovaniemi evel ma ouzoc'h vat) ! Er c'hêrioù e vez gwelet muioc'h a veloioù evit a skioù war an hentoù savet evite. Delc'hen a ra an dud da droadikellat, memes pa vez erc'h ha skorn kalet. Naturel e tiskwel bezañ, ha ken aezet

dezhe kemer o beloioù pa vez erc'h ha pa na vez ket.

Daoust hag-efi e c'hallfe skouer broioù hanternoz Europa bezañ talvoudus d'imp amañ ? Da c'hoût an dra-se hon eus goulennet gant un ezel eus ar gevredigezh Trégor-Bicyclette.

- Da gentañ neuze, daoust hag-efi ez eus ur bern tud amañ a garfe implijout muioc'h o beloioù da vont da vale pe memes da labourat ?

- Ya sur, ha muioc'h-muiañ a dud zo o vont d'o labour war velo. Met n'eo ket evit mont d'al labour hepken : **prenañ dlankajoù**, kas ar vugale d'ar skol en ur c'harr bihan sachet gant ur velo ha da bourmen evel-just. Setu perak hon eus aozet pourmenadennoù ur wech ar miz, 'mann 'met war hentoù bihan, digor d'an holl, bras ha bihan, yaouank ha kozh. Gant se e c'hall an dud dizoleiñ hon c'horn-bro ken kaer, an natur hag ivez ar **glad sevenadurel**. M'ho peus c'hoant da c'hoût muioc'h, kit da welet war al **lec'h-lenn**-mañ : <http://www.tregorbicyclette.fr/>.

- Ha ne vez ket kavet re ziaes an hentoù dre amañ, n'eo ket gwall blaen ar vro ?

- Ya gwir eo, met da gentañ e vez taolet pled ouzh se pa

vez aozet ar baleadennoù. Choazet e vez hentoù ha n'int ket re ziaes. Ret eo lâret ivez eo kalz aezetoc'h gant ar beloioù a-vremañ krapat ar c'hraivoù, n'onn ket pet tizh zo laket dezhe. Kregiñ pe adkregiñ a c'hall bezañ start un tamm met kalz a blijadur a vez prestik goude.

- Pa vez kavet hentoù, n'int ket re zañjerus ?

- Pal ar gevredigezh zo just a-walc'h lakat an tiez-kêr pe ar **c'homuniezhoù** d'ober hentoù evit ar beloioù. Da c'hortoz eo mat goût ivez ez eus un toullad brav a hentoù bihan, nebeut anavezet gant an dud, e lec'h ma c'haller mont trankil hep risk ebet da vezañ diskaret gant ur c'hamping-karr e kement tro-gorn zo tout. Ha just a-walc'h en deus laket Trégor bicyclette kartennoù war al lec'hienn Internet.

- Ur bern tud a ra VTT (pe belo MTB : Marc'h-houarn Treuz Bro) bremañ, se zo diouzh ar c'hiz, hañval eo pe n'eo ket ?

- Bale, mont da labourat, kas ar vugale d'ar skol, mont ha dont e kêr, n'eo ket evel kemer perzh en ur redadeg pe klask mont war reier gant ur velo. Sport n'eo ket, evit lâret, hag an dud a zeu da bourmen gant Trégor-bicyclette a vez

peurviañ gant ur velo VTC (pe : FPH Forzh Petore Hent I).

Ya, evel e vez gwelet vat amañ n'eo ket memes spered. Hag e c'haller lâret ouzhpenn n'eo ket hañval tamm ebet spered an den pa vez en un oto ha pa vez war ur velo. Ne vez ket gwelet alies tud war velo prest d'en em gannañ evit goût piv a dremenno da gentañ er c'hroashent. An dud war o belo a ziskwel bezañ siouloc'h ha muioc'h digor ho spered evit ar re paket en o oto.

Ma n'eus ket deuet kalz tra diwar divizoù Kopenhagen etre ar gouarnamantoù, n'eo ket evit kelo-se n'hoc'h ket kap c'hwil d'ober un dra bennak evit ar blanedenn : kit war velo tudoù, mat eo evit ho yec'hed hag evit an endro ivez !

**Strollad « kaozeal »
Kreizenn Sevenadurel
Lannuon
kaset en-dro gant Herve
ar Barzh**

Rubrique proposée par Ti ar Vro Tregor-Goueloù, fédération des associations culturelles bretonnes du Trégor-Goëlo. skolallebrig@orange.fr / 02 56 35 51 20 pe 02 96 49 80 55. www.allebrig.com

Gerioù diaes :
riblenn-straed : trottoir
bandenn-rod : pneu
stlejell : traîneau
Kirvi-erc'h : rennes
prenañ dlankajoù : faire ses commissions
glad sevenadurel : patrimoine culturel
lec'hienn : site
komuniezhezh : communauté
endro : environnement
Pep hini a c'hell skrivañ!
M'ho peus traoù da gentañ na dortit ket ha deuit e darempred ganimp.